

Kantik d'an Aotrou Sant Per Kore

DISKAN :

*Aotrou sant Per, hor zant Palron,
Kreskit hor feiz, hon nerz-kalon,
Ma vezimp holl gwir vugale
D'an Iliz savet gant Doue.*

1. Pesketour lenn Jenezareth,
Gant hor Zalver pa 'z eo galvet
Da zavetei an eneoù,
Raktal a lez e rouejou.
2. E feiz 'zo krenv, ha d'hor Zalver
Oc'h embann mister an Aoter,
E lavar : « C'houi, ha c'houi hepken,
A ro d'an dud gwir sklerijenn. »
3. Kalz n'anavezont ket Jezuz
Daoust d'e oberou burzudus ;
Simon a lavar koulskoude :
« C'houi eo ar C'hrist, gwir Vab Doue. »
4. Ha Jezuz d'ezan a respont :
« Te a zo Pêr, ar gwir maen-font,
A vo diazezet warnan
An Iliz santel er bed-man. »
5. « Te 'vezo prins an Ebestel
Ha kenta Pab an dud fidel ;
Eus rouantelez an Nenvoù
Me 'roio d'it an alc'houezioù. »



6. E garantez a zo dispar :
Na tud, na madou, an douar,
Netra outan n'en deus miret
Da yont da-heul Salver ar bed.
7. M'em deus nac'het eur Mestr ken mat,
Evitan pebez kalonad !
Gant daelou puilh 'hed e vuhez,
E verk glac'har ha karantez.
8. Ha pa vo diskennet warnan
D'ar Pantekost ar Spered Glan,
Raktal ez lay d'an eneoù,
D'o zavetei a viliadou.
9. Ar baianed, ar Juzevien
A zeuy da veza kristenien :
Na poan, na trubuilh, na prizon,
Netra ne drec'h e nerz-kalon.
10. It, o sant Per, breman da jom
Pell diouz ho pro, da gêr vras Rom,
D'ar gêr a vo kêr-benn ar bed
Gant gwad hor Zalver dasprenet
11. Goude labouriou ugent vloaz,
D'ho tro c'houi varvo war eur groaz ;
Met diwar gwad ar verzerien
E savo danvez kristenien.
12. Savit d'an nenv, Pastor karet !
Enò, gant Doue kurunet,
A ! kendalc'hit da rei skoazell
Gant ho pedenn d'an dud fidel.